

SKRIVADENN KENTELIOU AN NOZ

D'ar Sadorn 11 a viz Meurzh 2006

War an aod

Vakañsoù bras a zo ha brav eo an amzer. Goude merenn emañ ar vugale war an draezhenn. Ebatoù a bep seurt a zo ganto : sevel o serpantoù-nij en aer pe redek war-lerc'h ar volotenn. Plijout a ra kalz dezho ivez ober kestell gant traezh ha dastum kregin war vordig an dour.

(Fin skrivadenn ar CE)

.....

Ur vandennad paotredigoù ha merc'hedigoù a gas kalz a drouz en ur stlepel dour an eil ouzh egile. Prestik eo gleb an holl. Mall a zo warno mont war-neuñv betek ar pont koad ahont. Splujañ ha displujañ a vo graet ha neuial betek ma vo aet skuizh an dud.

(Fin skrivadenn ar CM)

.....

Ar re yaouank a blij dezho ivez rouzañ en o gourvez war o serviedennoù. Da ziwall a zo memestra, ret eo en em wareziñ diouzh skinoù berv an heol. E gwrez kreiz an deiz eo furoc'h gwiskañ un tamm dilhad pe lakaat dienn war ar c'hroc'hen. Ar re zievezh a vo heñvel a-walc'h ouzh ligistri poazh en noz-mañ !

(Fin skrivadenn ar Skolaj)

.....

Pelloc'h, war ar c'herreg hag ar reier, eo stank ar furcherien a bep seurt ha birvilh a zo ganto. War an tre emamp ha reverzhi vras a zo. Setu, bec'h d'ar c'hranked, d'ar chevr, d'ar silioù, d'ar meskl, d'ar c'hokouz ha me 'oar... Avenelloù ganto, paneroù-dorn pe reoù kein, sailhoù, kregier, rastilli, pigelloù... aloubet eo an aodoù gant hor c'hlaskerien aour mod-nevez. N'eus ket amzer da goll, bremaik, pa vo lanv, e vo ret treiñ kein ha skeiñ en-dro war-zu ar gêr.

(Fin skrivadenn al Lise hag oadourion)